

Ia te 'zo caer, Rom, an aour, ar perlez
N'o d'eus biscoaz, en dro d'eur rouanez,
Tennet varni kement a estlammou
Ha te varnout, Rom, gant da relegou.

Ar bed-ma 'zo eur mor bras fuloret,
Te zo ar roc'h ez eo outa staguet
Baguig sant Per, pesketour eneou
Evrus ar re a bak e rouejou !

Rom, te 'a zo evel ous eun tour-tân
A sclerijen ar bed oll, eb ehan,
Ac a ra deomp gueleet a dreuz an noz
Aotchou evrus ha porz ar baradoz.

Rom, ker ar Pab, *Pontif* bras ha *Roue*,
Te 'zo deza bet roët, gant Doue,
Evit galloud gouârn, æz, an Iliz,
Gant ar brassa liberte ha frankiz.

O ! prisonnier palez ar *Vatican*,
Ken iskinet gant bugale Satan,
Ni a gasso d'an Env or pedennou,
Ac e couezo erfin ho chadennou.

O ! Iliz Rom, c'hui 'zo mam ha mestrez
D'an ilizou eus ar bed oll a bez ;
C'hui eo a gass ar c'henta Pastoret
D'ar c'harteriou oc'h eus dezo merket.

Er mez an Arc'h epad an dour diluj,
Den ne gavas savete na *refuj*,
Er mez ive ahanoc'h, Arc'h santel,
Den na dizo ar vuez Eternel.

O ! Mam garet, Iliz santel Romen,
Kentoc'h eguet n'ho tizonjin biken,
Ia, ra zeuio va brec'h deo da sounna
Ac ous va staon va zeod d'en em staga. (1).

C'hui 'vo bepred e peñ^{er} va oll sonjou,
C'hui 'vo bepred sourcen va oll joaiou,
Ia c'hui a vo, betec fin va buez,
Euñ va c'halon ar vrassa carantez.

(1) Oblivioni detur dextera mea, adhæreat faucibus meis lingua mea, si non meminero tui...

J. Brignou